

Ilir
Fizians ann Iliz en Aotrou Doue.

PSALM CXX.

VI. I.

Si Deus pro nobis, quis contra nos ?

Mar de Doue a du ganimp,
Dirag peu sort den a grenimp ?

SANT PAOL.

Ma daoulagad a zav huel
Trezeg ar meneziou santel
A belec'h e teui d'in skoazel ;
Skoazel d'in a berz ann Aotro
Ann hini 'n euz gret ann Envo,
Ann douar ha kement tra zo.
— Ho treid, 'mean, na lezin ket
Da stokan ouz ar mein kalet,
Ha neb ho tiouall, da gousket,
N' c'houlan ket, 'me 'nn Aotrou Doue,
Da gousket bannac'h e teufe
Neb a ziouall ma bugale.
Me a vezo ho tifenner :
Ma dorn a vo enn ho kenver
D'harpa ac'hanoc'h e peb amzer.
Me vo deiz ha noz a zevri
O viret ann heol d'ho tevi,
Al loar d'ho lakat var fazi.
Ann Aotro 'vez ouz ho tiouall :
Pa vec'h o vont da goll raktal
Hennez ho tenno a bep goall.
Pe vec'h er ger, pe vec'h e mez,
Hen a lako varnoc'h evez
Ac'han da bep peurbadelez. —
Gloar d'ann Drindet! gloar penn-da-benn
Digant he oll grouadurien
A viskoaz, breman, da viken !

BARZ AR GOUET.

(M. = Crault)